



AR PERSON BARVEC,

VICTORIUS VAR E ESCOP.

Var ton : MONSIEUR DE CATINAT.

UN Escop deus a Franç, den a galite vras,
Oc'h ober e vizit ur vech en em dromplas :
Ur Person a gayas hac a vor rust a vin,
Rac baro en devoa evel ur c'habucin.

Ar Person a hend all a voa bisajet mad :
Tal huel, ha fri caer, ha lêm a zaoulagad,
Hac a rê e zever ebars en e barres
Couiz ha ma rê nicun ebars en dioces.

AN ESCOP.

An Escop, p'er guelas, a deuas d'en attaqi,
Balamour d'e varo, ha d'en inquieli :
A belec'h, emezàn, hac eus a bes canton
Oc'h-u deut er vrô-màn evit beza Person ?
Hac eur ministr oc'h-u a doues an heritiquet,
Pe eur bèlec bennac eus ar schismaticet ?

AR PERSON.

Autrou, eme'r Person, a drugare Doue,
N'en don en nep sêgon an eil nac eguile :
Me gred on christen mad, catholig, coulz ha c'houi,
Ha ne oun qet perac e teuit d'am attaqi.

AN ESCOP.

Ho paro, eme'r Prelat, a gavàn difêgon,
Ha ne apparchant qet ouz bisach ur Person.
En amzer Moyses guechal voa permetet
Douguen ar barvou hir, mes bremâ int difennet.

Pell zo aba eo custum, nep a zo christenien,
D'en em raza, qempen, dreist oll ar vèleyen;



Ne veler barvou hir nemet gant ar Souisset,
Gant tud a Voscovi pe gant chismatiget.

Pere zo ridicul en ho c'hompportamant;
Qercoulz en o barvou vel en o guiscamant;
Hac rac-se e cavàn oc'h eus ur fazi bras
Ne douzit ho paro evit nettât ho faç.

Evel un heretiq ho caver er guis-se,
Ha goal exempl a roit gant ar varo hir-se.
Ret e deoc'h e zroc'hi pe me raï deoc'h e ober;
N'ouzoc'h qet marteze ous piou oc'h eus affer?

AR PERSON.

Autrou, eme'r Person, na zisplije ganeoc'h,
Va baro a zo din, hac hoc'h hini zo deoc'h:
Gant Doue meus-hi bet, ha ne gredfen bigen
E ve ret distruja ar pezh a ro d'an den.

O barvou zo roet gant Doue d'ar voaset
Evit o distingui diou ar femelezet:
Ar re a fell dezo beza hanval outo,
A reñq evit ar guir touza pis o baro.

Mes me ne fell qet din beza feminizet,
Na trêc'hi va baro, hac hi dija grizet.
Ne deo qet Souisset hepgen a zoug baro,
Meur a hersonach mad pere a zo maro,
O deus-hi bet douguet, hac a voa tud santel,
Tud habil, tud prudant ha christenien fidel,
Ar Patriarchet côs el lezen ancien,
Ha prophetet Doue etouez ar Juzevien.

Ebestel hor Zalver, hac an Doctoret bras,
Evel Sant Augus in, Sant Jerôm, Sant ambroas,
Hac ar Pab Sant Gregor, ha Sant Yan Chrisostom,
Hac ouspen daou c'hant Pab demeus ar guêr a Rom,
A velomp zo pintet gant barvou bras hac hir.
Ha n'o zougjent qet sur, ma n'o divize guir.
N'int qet tamallet gant nicun en o bro,
Qent-se voant enoret balamour d'o baro.

Ha mar en deus douguet ha Calvin ha Luther
Barvou hir evelte ebars en o amzer,

Ne deo qet ho barvou a zo bet tamallet,
Nac a so bet caos ma voant heretiqet.

Ar gabucinet paour na scandalisont den
Evit douguen barvou etoues ar gristenien.
Nan, nan, en em razit, grognit neb a garo,
Evidon-me biqen ne droc'bin va baro:
Guell ê ganèn mervel, mar bezàn condaonet,
Eguet coll va baro, pa emeus-hi maguet.

AN ESCOP.

An Escop er coler a lavar d'ar Person
E renq en em regli diouz uzach ar c'hanton.
Uzach ar gabucinet, hervez o reglennou,
Eo douguen, emezàn, ha caout hir ho barvou,
Mes c'honi zo ur Person, n'en doc'h qet cabucin,
Hac a renq ho paro distaga dious ho min;
Rac-se absolutant, na zisplichfe ganeoc'h,
Dre va autorite ec'h ordrenàn deoc'h
Ma teuot pront d'e zroc'ha, anez certenamant
E vezoc'h punisset evel un insolant.

AR PERSON.

Eur c'hriminel paour a vize condaonet
Da vont d'ar galcou pe da veza crouguet,
Ne vize qet tristoc'h eguet ma oa'r Person
Goude beza clêvet e gondaonation.

Autrou Doue, mezàn, hemàn'n displijadur!
Ret e ve em enep cruel ha dinatur,
D'am beza condaonet da drec'hi va baro;
Nan, nan, guel ê ganèn anduri ar maro;
Ha grit a garfot din, pa dlefac'h va laza,
Va baro a virin bete'n heur diveza.

AN ESCOP.

Ar Prelat o velet aheurtet ar Person,
En accuzas d'ar Roue hep na guir na rêson;
Hac a laras dezàn: Sir, ho majeste
E deus va enoret ha roet din qalite.

E deus va grèt Escop ha roet din gallout
Ebars em dioces da gommandi partout ;
Ur Person paysant a zo em escopti,
E deus, var a velàn, c'hoant d'en em revolti.

Goab a ra ac'hanòn, ha ne fel qet dezàn
Oboissa d'am urz, na ne rei, emezàn.
Justiç a c'houlennàn digant ho Majeste,
Ha condaonation a enep an den-ze.

AR ROUE.

Ar Roue pa glêvas ar Prelat o Parlant,
A lavares neuze : ennes so insolant ;
Ret eo e chasseal demeus an escopti
Ha demeus e barres, evit ma furai.
Rentet voe eul lizer sinet gant ar Roue
D'ar Person d'e barres, hac estonet e voe.

AR PERSON.

Ia da ! emezàn, pa lennas al lizer,
Bourdet on ar vech-màn, ne doun qet hep affer.
Ar Roue a parlant, n'aller qet rezita ;
N'emeus gard da zifen, ret eo oboissa.

Ha guell è ganèn c'hoas rancout quitât va bro
Eguet n'en deo rancout distruch va baro.
Mes pelec'h e zin-me ? Ar Roue ne verq qet
Pelec'h e fel dezàn e rafen va retret.

P'am eus va liberte, n'ouffen qet ober guel
Eguet mont da Versaill da velet ar c'hastel.
Biscoas n'on bet eno, hac e elevàn conta
Ne zeus pales er bed comparachet outâ.

N'en deue pales er bed comparachet ountâ.
Eno vo, a glevàn, e velin traou nevez
Ha ne veljen biscoas vardro va zieguez ;
Ar Roue a velin hac e gourtisanet,
Ha tud ar re vrassa a voe biscoas ganet.

C'houi, va baro, zo cauz ma rer din-me pourmen,
C'hoant bras zo d'o drêc'hi, mes n'er gresen bigen,

Ha james disparti entrezomp na vezo
Na vezie da guenta condaonet d'ar maro.

Mont a ra ar Barveg da Versaill da chom,
Arc'hant a gas gantàn, ne ouzer qet ar som;
Bale a ra dre guêr hac en dro d'ar pales,
A ziabars er guel qercoulz ha diaves.

Guelet a ra ivez ar Roue pa sorti,
Pelec'h bennâc e za, ha pa vez o tebri;
Pa za d'an oferen e za p'e heuill ive
Da glêvet ar musiq a rer d'e Vajeste.

Ne zeus eno jardin na bali da redec,
Galeri, na traou caër, n'o guel tout ar Barveg.
Ar bed oll a c'houlén, ous e velet hardis
Da dostat ous ar Roue, hac a sell outàn pis.

Piou ar bêleg barveg a velomp-ni amàn,
Na pe a léc'h eff-èn? Nê qet eus ar vro-màn.
Den ne voar lavaret piou é, na p'eus a vro,
Souezet é an oll o velet e varo.

AR MARQUIS.

Alafin ur Marqis, mignon bras d'ar Roue,
A yas da gomz ountà dre gurioste.
Autrou, eme'r Marqis, o comz ouz ar Barveg,
Dious ho habillamant me gred e zoc'h bêleg.

Me gar ar vêleyen zo mignon d'ar Rone,
Ha mar oc'h eus affer dirac e Vajeste,
Me gomzo evidoc'h dious an affer oc'h eus,
A rento servich deoc'h dre ar pouvoar a meus.

AR PERSON.

Ho trugarez, Autrou, emezàn d'ar Marqis
Oblijet bras on deoc'h demeus hoc'h honestis:
Me zo eur Person qes exilet eus va bro,
Ha ne meus qet a geue hervez m'ê deut an dro.

Nep a vez exilet eus a bers ar Roue
A gustum detesti, fachat, touet Doue,
Ha pedi mallozou gant nep zo caos dezo
Da veza exilet, chasseet deus o bro.

Evidon-m'er c'hontrol, ne meus chagrin c'bet
O sonjal em hini, na d'e veza quitted;
Rac guell e zoun amàn eguet na oan eno:
Ne ma on get er guar-màn a enep va meno.

Em parros ne gaven nemet Poan ha trevel,
Labour epad an deis, en nos rancout sevel,
Côves, guelet tud clàn hac ober sarmoniou,
Ha caout poan ha chagrin ha cals a afferiou.

Amàn e moun ervad; n'en deus en tout netra
O troubli va speret, nac ous va dieza;
Lavaret va brevier, celebri va oferen,
Ar rest eus an amzer a zo din da bourmen.
Ha sulvui a velàn, emeus plijadurez
O velet traou qer caër pe gaëroc'h bemdez.
Gontantamant a meus, mar am boe biscoas,
O velet ar Roue, ha mui am bezo c'hoas,

Eur barados bian e cavàn e bales,
Hac o sellet ountà ne en oufen james:
Ha rac-se, va Autrou, n'emeus gard d'ho pedi
Da barlant c'vidon na d'am recommandi.
Ha qeit ha ma caro va lêzel er vro-màn
Ne c'houlennàn get guell eguet mervel ennàn.

AR MARQUIS.

Ar Marquis a c'hoarze o clêvet ar Person,
Hac a voa joa gantàn caouet an occasion
Da barlant anezàn e prezang ar Roue;
Disqueuset voe'r Barveg, ha gemennet e voe.

AR ROUE.

Ar Roue, p'er guelas, a c'houlennas ountà,
Perac, ha c'houi Person, e zoc'h-u er vro-mâ,
Ha ne zêt d'ho parres da viret ho tènved,
Evel m'ê ho tever ha ma zoc'h oblijet?

AR PERSON.

Allas! Sir, emezàn, mar emeus-li quitted,
Ne get me zo qiriec, ganeoc'h ouu exilet.

Evit oboissa da urz ho Majeste,
Emeus abandonet va dènvéd er c'his-se:
Cetu amâ'l lizer, gant ho torn ê sinet,
Hervez d'oc'h ordrenanç emeus oboisset.

AR ROUE.

Penaus, eme'r Roue, exilet oc'h amâ!
Pa exilàn-me tud, pell eont dious ar vro-mâ.
Hac ouspen gement-se, me ne exilàn get
Anes n'am be rêzon: petra eus-hu grêt?

AR PERSON.

Mar plich d'ho Majeste va c'hlêvet, cmezâ,
Me gonto deoc'h perac e zon deut er vro-mâ:
Va Frelat, a gredàn, en deus va accuset
Dirac ho Majeste, hac en deus ho suadei.
Balamour d'am baro, e dêfot e zroc'hi,
Cetu eno'r sujet ma tisplijàn dezà:
Caër am boa rêzoni ha clasq en em difen,
Ne brize get selaou âr pezh a lavaren.

Re' voa din, emezân, hep rezoni morse,
Trêc'hi cren va baro, p'otramant e croc'hje;
Va humor zo calet, ha ne meus get gallet
Consanti de zrêc'hi anez bout condaonet.

Ma vizen chicaner, var boues dispign arc'hant,
Em bize gonezet o veza appellant;
Mes guell ê bet ganèn fiziout er Brovidanç,
Hac en em resolvi da zouffr poan ar setanç.

Ar setanç zo roet ma vizen exilet,
Ha gant soumission emeus oboisset,
O veza guell ganèn sortial eus va bro
Eguet ne vije sur distruja va baro.

Ho Majeste, Sir, o tont d'am exila,
Ne lavare get din pelec'h en em denna;
Pelec'h e yazen -me huell d'ober va retret
Eguet da Versaill? evel ma zon deuet?

Nemet er barados ec'h aljen-me pignat,
Ne vouizen donet guell evit ober ervad.

D'ho Majeste, Sir, va Fring ha va Autrou !
En em soumettàn tout ha doc'h ordrenançou.

Ho madeles zo bras, credi a ràn certen,
Hervez ma remerqàn var ho pizach laouen;
E Permettot din -me douguen va baro qez,
Pa na ra droug da zen, bete fin va buez.

AR ROUE.

It, it, eme'r Roue, achuet ar proces :
Dalc'hit mad d'ho paro, ha distroit d'ho parres;
Daou c'hant scoet ho pezo evit ober ho peach,
Ha me a c'hourc'hemen na zeui den d'oc'h ampeh.

An histor zo plezant evit ar Person qez,
Mes evit an Escop n'en deus bet nemet mez.
Ne barlantet en pær, pales nac er ru,
Nemet dious ar Barveg gant e zoutanen du.

Ar bed oll a lavar en deus eur speret mad;
Ha nemet goab na rer partout eus ar Prelat.
N'en de get mat d'an dud, dre zomination,
En em exposi re da gaout confusion.

